

KANTIK VAR AR STABAT

Great gant an aotrou L. L.

Ton : *Debout sur le mont du Calvaire.*

I

Var ar menez Calvar Jesus,
Ankennius a varve!
Mari, he Vam drugarezus,
Ec'hars he Groas a lenve!

DISKAN :

Gwerc'hes santel, o Mari!
O Mam! dre ho kouliou,
Da va ene, me ho supli,
Roit, roit daelou.

II

Ar beden deuz he Mab divin
O vervel a glevas!
Ne blegas ket var he daoulin...
En he c'halon e varvas!

III

Evidomp-ni crucifiet,
Jesus a zo maro ;
Evidomp-ni oc'h eus skuillet,
Mari ho taelou c'houero.

IV

Breudeur, gant Jesus hor Salver,
Piou ne garfe mervel,
Evel Mari, he Vam dener,
Ha d'he Groas beza fidel?

O Mari! lakit var va fenn
 Ar spern deuz va Doue ;
 Lakit di-me ar gurunen
 Deus va Jesus, va Roue!

VI

Mari, gant an tachou toullit
 Va zreid ha va daouarn ;
 E kichen Jesus va staghit
 Gant ho morzoliou houarn.

VII

Toullit gant al lans va c'hostez,
 Doun betek em c'halon,
 Evit dirag an oll diskuez
 Va glac'har, va c'hompsonion.

VIII

Pa rankin kuitaat an douar,
 Pa va galvo Jesus,
 Mari, grit ma velin he c'hloar,
 En he Barados eurus!

PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, 28 Juin 1875.

J. JÉGOU, vic. gén.